

# AR VUHEZ KRISTEN

Gouere 1939

— N° 7 —

« Eun Tad Kapusin indian o  
lavaret e oferenn genta... »



## LENNIT PIZ

### KEMENT-MAN

Priz ar gelaouenn :

Ar Vuhez Kristen" hepken :

Koumanant ordinal : 10 lur

Koumanant a enor (gant perz e 365 oferenn) :  
15 lur

Ar Vuhez Kristen ha Kenteliou St Fransez

Koumanant ordinal : 13 lur

Koumanant a enor (gant perz e 365 oferenn) :  
16 lur,

Kenteliou Sant Fransez hepken :

3 lur (eur skoed)

SKRIVA DA :

Monsieur le Directeur de « Ar Vuhez Kristen »

*Couvent des Capucins*

C. C. 209-81 Nantes

ROSCOFF (Finistère)

## Taolenn ar miz

Kenteliou an Aviel.....	p. 123
Eur c'havell goullou.....	p. 125
Nevez beleget int.....	p. 127
Eur paotr divorfil.....	p. 129
Daelou ar Werc'hez.....	p. 130
Pa vez ar sul gant Lisette.....	p. 131
Sebezennou eur Santegad.....	p. 134
Santez Anna ha Nikolazig.....	p. 135
Jezuz-Krist hag e relijion.....	p. 137
Abardaez-hañv.....	p. 139

Pep gwir miret striz.  
Cum permissu Superiorum

## Kenteliou en Aviel

Ar wezenn-fiez milliget.

D'al lun bleuniou, Jezuz a guitaas Betani, mintin mat, evit mont adarre da Jeruzalem. O vont gant e hent, e tigouez d'ezan tremen e-kichen eur wezenn fiez goloet a zeliou hag e tosta outi evit klask eur frouezenn bennak. Met ne gavas nemet deliou. Neuze e lavaras d'ar wezenn : « *Biken mui den ne zebro eus da frouez* ». Ha kerkent e tizec'has ar wezenn-fiez.

— Ar varc'hadourien kaset kuit eus an Templ.

Setu Jezuz hag e ziskibien e Jeruzalem. Aet en Templ, Jezuz en em laka da deurel er-maez an dud a oa ennan o prena hag o werza, ha da ziskar taoliou ar varc'hadourien a oa eno o troka arc'hant. « *N'ouzoc'h c'houi ket, emezañ d'ezo, eo skrivet : Eun ti a bedenn eo va zi ha c'houi ho peus graet anezan eun toull-laeron.* » Ar c'homzou-se n'oant ket hepken evit ar varc'hadourien, met ivez evit ar veleien o leze d'ober o marc'hajou en Templ.

Fellout a ra da Jezuz rei d'an holl da gompren an enor hag ar resped dleet da di an Aotrou Doue. Ha ma oa dleet dougen resped evelse da Dempl ar gwir Doue e Jeruzalem, pegement muioc'h d'hon ilizou-ni, p'eman enno e gwirionez, Jezuz-Krist, Doue ha den, e Sakramant an Aoter.

Da hanter-noz e oa distroet adarre Jezuz da Vetani. D'ar meurzh, en eur vont en-dro da Jeruzalem, an diskibien a wel ar wezenn-fiez dizec'het en derc'hent. Per neuze a lavaras da Jezuz : « *Mestr, setu dizec'het krenn ar wezenn ho peus milliget* »

Gellet en defe Hor Salver lavarout d'ezo e oa ar fiezenn-se eur skeudenn eus ar re a lez da goll grasou an Aotrou Doue. Ne veritont nemet malloz ha kastiz Doue.

— Nerz ar bedenna.

Met Jezuz a oa gwelloc'h gantan komz d'e ziskibien, eur wech muioc'h eus nerz ar bedenn graet gant eur feiz krenv.

— « *Kredit e Doue, emezan, e gwirionez m'hel lavar d'eoc'h, ma kredfec'h, hep difizians ebet e hellfec'h ober kaeroc'h eget ar pez a zo c'hoarvezet gant ar wezenn-fiez. An neb ac'hanoc'h a lavarfe d'ar menez-se : lamm er mor, e sentfe outan ar menez. Rak se, e lavaran d'eoc'h : Kement tra a c'houlennit en ho pedenn, kredit e vezo roet d'eoc'h. Ha p'en em lakit da bedi, m'ho peus eun dra bennak enep ho nesa, pardonit d'ezan evit beza pardonet gant ho Tad a zo en Nenv. Met, ma ne bardonit ket, ho Tad a zo en Nenv ne bardono ket d'eoc'h ho pec'hejou kennebeut.* »

Bez' e oa paganed, meur a hini, deuet da Jeruzalem d'adori Doue, int ivez. C'hoant o doa d'anaout Hor Salver, hag int da dostaat ouz an Abostol Filip da lavarout d'ezan : « *Aotrou, ni garfe gwelout Jezuz* ». Filip a lavar an dra-se da Andre hag, o daou, ez eont d'hel lavarout d'o Mestr. Hor Salver hag a dlee mervel, tri dervez goude, evit ar baganed koulz hag evit ar Juzevien a respont d'ezo evelhen : « *Deuet eo an eur ma tle Mab Den beza savet d'ar*

gloar. E gwirionez, m'hel lavar d'eoc'h, ma ne varv ket ar c'hreunenn winiz taolet en douar, e chomo he-unan, (hep dougen greun all) met ma varv e tougo e-leiz a frouez ».

Eus e varo hag eus ar frouez a dlee dougen evit silvidigez ar bed eo e komze Jezuz evelse.

Dre-se ivez e tlee beza savet diwezatoc'h d'ar gloar dirak e Dad ha dirak an dud. Met o sonjal er poaniou kalet a oa dleet d'ezan gouzanv, Jezuz a lavar : « Ankeniet eo breman va ene; ha petra lavar-in-me ? Va Zad, pellait diouzin an eur-se. Evit an eur-se koulskoude ez oun deuet. Va Zad, enorit hoc'h ano ».

### Eur vouez eus an Neñv.

Ar c'homzou-se a ziskouez e oa Jezuz gwir den evel ma oa gwir Doue hag e sante evel domp pegen c'houero eo ar boan.

Kerkent m'en devoe Jezuz komzet evelse, setu ma voe klevet eur vouez eus an Nenv : « Hen enoret am eus hag hen enori a rin c'hoaz ». Souezet holl e oa bet ar bobl o klevout ar vouez-se. Lod a lavare : « Eun tarz-kurun eo » — « N'eo ket, a lavare lod all, eun Ael eo en deus komzet outan. » Holl ec'h anzavent ar burzud. Met Jezuz a respontas d'ezo : « n'eo ket evidoun-me eo deuet ar vouez-se; evidoc'h c'houi eo. »

Met burzud ebet n'helle mouga ar gasoni o doa ouz Jezuz e holl enebourien.

Jezuz a gomzas c'hoaz, hag e savas c'hoaz muioc'h a zroug enno. « Breman e vezo barnet ar bed-man; breman eman mestr ar bed (Satan) o vont da veza taolet er-maez. Ha me pa vezin a-uz d'an douar, a denno an holl davedoun. »

Komz a rae Jezuz evelse, evit rei da gompren peseurt maro a dile gouzanv.

Savet eo bet Hor Salver a-uz d'an douar pa 'z eo bet staget ouz ar groaz, ha neuze en deus chachet davetan an holl dud, paganed ha Juzevien; neuze int bet galvet d'E anaout, d'E garout, da heulia e lezenn, da vont gantan d'ar baradoz.

Hag e kendalc'h Jezuz da gomz d'ar bobl a oa ouz e selaou. « Emañ c'hoaz, ar sklerijenn en ho touez evit eur pennad. Kerzit eta gant ar sklerijenn-se, keit m'eman ganeoc'h gant aon na vefec'h tapet gant an noz; rak an neb a gerz en noz ne oar da belec'h e ya. Kerzit eta er sklerijenn evit beza bugale an deiz ».

Goude beza komzet evelse Jezuz a yeas da guzat. Gwelet a ra splann ne dalv mui d'ezan prezeg na zoken ober burzudou evit gounit ar re a oa en e eneb; ne vern petra lavare, petra rae, ne felle ket d'ezo kredi ennan. An Aotrou Doue en e vadelez ne ehan ket da skuilh e c'hrasou war eneou an dud. Met pa wel eun ene aheurtet na fell ket d'ezan selaou e gomzou hag a gendalc'h d'ober droug en desped d'e chrasou kaera, neuze e tro kein d'ezan evit e lezel en e follentez.

Diouallit na zigouesfe ganeoc'h kement ha gant Juzevien amzer Hor Salver. Ganet oc'h bet en eur vro gristen; savet oc'h bet gant tuñ leun a feiz; klevet hoc'h eus alies prezeg lezenn Doue; pep seurt sikour a gavit en-dro d'eoc'h, dreist-holl ar sakramanchou.

Ra vezo meulet Jezuz-Krist !.. Bepred



## Kenteliou Sant Fransez

- KELAOUENN AN DREDE-URZ -

Priz evit eur bloaz : eur skoed (3 frs)

Ar c'houmanant a c'hell beza paet e timbrjou. — An neb na fell ket d'ezan reseo mui ar gelaouenn, a zo pedet da skriva war ar golo : *refusé*. ha da zigas anezi d'eomp en-dro dre ar post.

An holl liziri a dle beza kaset da : R. P. Eugène Le Quéau, Couvent des Capucins, Roscoff, (Finistère). — C/C. 291-62 Nantes.

### Vertuziou Sant Fransez : e garantez evit Doue

Va Breudeur ha va C'hoarezed ker,

Hon Tad sant Fransez a zo unan eur ar brasa sent a zo bet war an douar, ha c'houi ho peus ar c'hras da veza e vugale.

Anaout a rit e vuhez; lennet, adlennet, studiet ho peus anezi, ha c'hoant ho peus da gemer skouer warnan ha da gerzout war e roudou.

Hogen, — ret eo d'eoc'h hen intent mat, — an holl vertuziou-se o deus savet sant Fransez ken uhel er Baradoz, — Santez Marc'harid-Mari he deus eun dervez gwelet anezan « en eur sklerijenn splann ha dudius, uheloc'h eget an holl sent », — ar vertuziou-se, a lavaran, a zeu holl eus e garantez e-kenver an Aotrou Doue.

\*  
\*\*

Hag ar garantez-se he-unan, eus a belec'h e teue da Fransez ? Eus e zevosion da Sakramant d'an Aoter ha d'ar Basion : goude beza taolet eur sell war an Osti pe war ar Grusifi, n'helle mui nac'h seurd ebet ouz an Aotrou Doue.

Bepred ivez e c'houlenne digant Hor Salver ar c'hras da garet anezan : « *Aotrou santel-meurbet, emezan, na me a garfe ho karet, na me a garfe ho karet !* »

Evit karet an Aotrou Doue, e ranker her goulenn. Pedomp sant Fransez da rei d'eomp da gompren kement-se ha da rei d'eomp perz en e garantez evit Doue.

Ar garantez-se a oa evel eun tan-gwall. Diwar e vuzellou ne goueze nemet pedennoù entanet, bennoz ha meuleudi e-kenver an Dreinded-Sakr, ha dalc'hmat e c'houlenne evit e ziskibien eur garantez tener ha birvidik evit an Tad, ar Mab hag ar Spered-Santel. Na pegen eürus ne vije ket bet o welout anezo holl o renta da Zoue ar gloar a zo dleet d'ezan a-berz an holl grouadurien.

Va Breudeur ha va C'hoarezed ker, greomp, ni ivez, evel Hon Tad sant Fransez : eveltan, kasomp bepred enor ha meuleudi d'an Dreinded Sakr, hag, evit hen ober ervat, galvomp d'hor sikour ar Werc'hez Vari, sant Mikael, an aelez hag ar sent.

Sant Fransez en doa ivez eun devosion leun a denerigez e-kenver Hor Salver, hag an devosion-se en deus skignet e sperejou hag e kalonou e vugale eus e deir Urz ha kement hini a dostae outan.

Dalc'homp mat d'an devosion-se !

\*  
\*\*

Ha pa sonje Hon Tad e Pasion Jezuz, neuze e faoute e galon o welout poaniou e Vestr, hag e klaske dalc'hmat renta d'ezan karantez evit karantez.

Va Breudeur ha va C'hoarezed ker, pedomp hag aspedomp sant Fransez da zeski d'eomp karet e gwirionez an Aotrou Doue. Met c'houi a c'houlennno marteze penaos gouzout hag hen e karer e gwirionez an Aotrou Doue.

Selaouit sant Fransez e-unan :

« *C'hoant ho peus da c'houzout hag hen e karit Doue ? Sellit mat hag hen e sonjit ennan dalc'hmat, hag hen e komzit anezan hep ehan, hag hen e rit pep tra evitan. Setu merkou gwirion ar garantez* ».

Sonjal dalc'hmat e Doue, komz anezan hep ehan, ober pep tra evitan, setu ar pezh a reas Hon Tad adalek an dervez ma tistroas ouz Doue betek e varo.

Ra vezo hor buhez-ni henvel ouz e hini ! Eveltan, e pep amzer hag e pep lec'h, karomp ha servijomp Doue a-greiz hor c'halon.

Eno eman ar santelez ! Eno eman ar silvidigez !

---

Lennit ha skignit « *Kenteliou sant Fransez* » !

## Reolenn da heulia evit ar vodadeg miziek

Meur a wech ez eus bet goulennet diganeomp eur reolenn da heulia evit bodadeg miziek ar Breuriezou. An hini a embannomp aman hirio, a vez graet ganti dija e meur a barrez, ha kredi a reomp e c'hell beza heuliet e pep lec'h.

### 1. Pedennoù evit digeri ar vodadeg

Ar pedennoù-man a zo tennet eus lidou an Drede-Urz evel m'int merket en ho leorig-dorn (leorig-dorn bihan p. 43, leorig-dorn bras, p. 105; Grand Manuel du P. Eugène d'Oisy, p. 262).

Ar Rener (pe ar Superiorez) a lavar : *Veni, Sancte Spiritus...* (an holl a gendalc'h); *Sub tuum...* (an holl a gendalc'h); *Respice...* (an holl a gendalc'h).

### 2. Lenn eur pennad eus ar Reolenn

Unan a lenn : *En hano Hor Salver Jezuz-Krist e komans* (pe : e kendalc'h) *Reolenn an Drede-Urz, lodenn genta pe eil, pe trede lodenn; pennad kenta, pe eil pennad etc...* (2 pe 3 bennad bep miz).

Evit echui, ar Rener (pe ar Superiorez) a lavar :

*Ma vezimp fidel d'hor Reolenn, Doue a roio d'eomp ar vuhez eternel.*

An holl a respont : Evel-se bezet graet.

### 3. Prezegenn hag aliou ar beleg Direktor

Er brezegenn-man, ar beleg a zispleg eur pennad bennak eus ar Reolenn, spered sant Fransez a Asiz, e vertuziou, hag an doare da ren eur vuhez kristen gwirion. Da-c'houde e roio an aliou a gavo mat diwar-benn gouelioù ar miz, an Indulgansou a zo da c'hounit, ha buhez ar Vreuriezh.

Neuze, pa vez lec'h, e vez graet lidou ar gwiskamant, pe ar profesion, ha roet an Absolven jeneral.

Ma n'hell ket ar beleg Direktor dont, arabat eo lezel a-gostez ar vodadeg. Neuze ar Rener (pe ar superiorez) a lenn pe a ro da lenn eur pennad bennak eus buhez sant Fransez pe diwar-benn ar Reolenn (war-dro dek munut).

### 4. Pedennoù evit kloza ar vodadeg

Ar pedennoù-man, evel ar pedennoù da zigeri, a zo tennet eus lidou an Drede-Urz evel m'int merket el leorig-dorn (leorig-dorn bihan p. 46; leorig-dorn bras p. 109; grand manuel du P. Eugène p. 265).

### 5. Eur c'hantig, ma c'heller, hag eur gest evit mizou ar Vreuriezh.

6. Ar rener (pe ar superiorez) pe unan all en e lec'h (evel ar sekretour) a **verko** gant evez piou a zo deut ha piou n'eo ket deut d'ar vodadeg.

EUN TAOL-LAGAD WAR VA BUHEZ : diwar-benn an doujans a dlean da Sakramant an Aoter.

1° — An iliz eo ti an Aotrou Doue. Eno eman Hor Salver o chom. Ha sonjit mat em eus e kement-se ?

2° — Pa 'z an d'an iliz, e tlean raktal sonjal e Jezuz o chom en Tabernakl ha plega va glin evit Hen adori. Eun wech digouezet em flas, n'em eus nemet eun dra d'ober, diskenn e dounder va ene ha chom unanet gant va Mestr. Daoust hag evel-se e ran, pa 'z an d'an iliz ?

3° — Pa 'z an d'an iliz, e tlean beza leun a zoujans. Ha n'oun ket boazet da sellout a gleiz hag a-zehou, evit gwelout piou a zeu en iliz ha piou a ya er-maez ? Ha n'oun ket douget da gaozeal, da c'hoarzin, da lakat ar re-all da c'hoarzin ?

4° — Sant Fransez en doa eun doujans dispar evit ar sakramant meulet ra vezo. War poënt-se, evel war ar poëntchou all, em eus da gemer skouer warnan. Ha klasket em eus hen ober ?

TAOLENN AN INDULJANSOU. — GOUERE 1939

Deiz	GOUELIOU	Indul.
2 S	Gouel ar Werc'hez o vont da di Elizabed .....	A. J.
8 S	Santez Elizabed a Bortugal .....	I. V.
9 S	6 <sup>h</sup> sul goude ar Pantekost .....	I. V.
11 M	S. Nicolas hag e gompagnunez .....	I. V.
14 G	S. Bonaventur E. ....	I. V.
21 G	S. Fransez Solano .....	I. V.
23 S	S. Laurans a Vrind .....	2 I. V.
26 M	Santez Anna .....	I. V.
27 Y	P. E. Mari-Madalen a Vartinengo .....	I. V.

Da zeiz ar vodadeg ha tri dervez d'ho c'hoaz : I. V.

TAOLIT EVEZ MAT ! — D'ar 7 Gouere, kenta gwener eus ar miz, e vezo lavaret e Rosko, e kouent an Tadou, oferenn Breudeur ha C'hoarezed an Drede-Urz.

HON ANAON. — *Plouvien* : Mari Janed Saliou; *Plouvorn* : J. F. Le Sann; *Kernilis* : Marie-Anna Le Roux; *Plouhinec* : Ursula Peuchet.

PIRC'HIRINAJ AN DREDE-URZ  
E SANTEZ-ANNA-WENED

a vezo er bloaz-man d'ar sul 23 a viz Gouere dindan renadur an Tad Benead-Joseph, Provinsial. — Digoret e vo, evel kustum, d'ar sadorn da noz (22 Gouere).

An Tad Brieg a yelo d'ar Pirc'hirinaj gant Breudeur ha C'hoarezed an Drede-Urz eus eskoptiou Kemper ha Sant-Brieg.

An neb a zisprijfe an holl c'hrasou-se, a vefe ivez, eun deiz bennak, dilezet gant Doue.

Gwir eo, kendalc'h a ra da rei grasou d'an dud fall betek fin o buhez, met grasou, siouaz, na devint ket a-benn da drei d'ar mat o bolontez fall.

Plijet gant Doue na c'hoarvesfe an dra-se gant hini eus va lennerien.

Eur  
c'havell goullo



Nag e oa koant ar gwele bihan... ha koantoc'h c'hoaz ar bugelig a oa ennan... ! Eur paotrig, e hano « Jojo ». E dad hag e vamm ne ouient ket peur o deveze sellet awalc'h outan, poket awalc'h d'ezan...

Ha pa veze ar paotrig o c'hoariellat en-dro d'ezo, e raent evitan hunvreou kaer : pa vezo bras... en tu-man, pa vezo bras... en tu-hont...

Pinvidik eo an tad... d'ar paotrig ne vanko netra...

Peogwir n'eus nemetan...

Peogwir n'eo plijet gant an tad hag ar vamm kaout nemet unan... unan hepken.

Eun nosvez, setu ma krogas ar paotrig da grial gant ar boan benn... Leski a rae e empenn evel pa vije o vont da faouta... tan an derzienn a verve en e zaoulagad... berraat a rae e alan. D'an daoulamm e teue ar maro...

— Mervel, o, n'eo ket possubl, a lavare ar vamm, n'em eus nemetan !

*E-kichen ar gwele, an tad ne lavare ger, evel eun den abafet...*

— Klask a rin e savetei, a lavaras ar medesin; met re vat e ouie e yafe an trec'h gant ar maro...

*Ar vamm a vriate he bugel evit e zifenn gwelloc'h diouz an ankou.*

*M'en defe gellet komz en defe marteze ar bugel lavaret d'ezhi :*

« Mamm, va lez'ta da vont kuit... d'ar baradoz... da glask mignoned bihan... da c'hoari ganen... inouet oun aman va unan... »

*Diouz ar mintin, epad ma kane al laboused ha ma tigore ar bleuniou... e teuas an Aotrou Doue da gerc'hat Jojo evit e gas d'ar baradoz da c'hoari gant an Elez...*

*Pebez levez e palez an Dreinded !*

*Pebez tristidigez war an douar !*

*Pa voe echu an interamant ha laket Jojo da gousket en douar yen..., pa zigouezas an tad hag ar vamm er gear..., pebez rann-galon evito gwelet goullou an ti... goullou ar c'havell...*

*Ma ne vije ket bet Jojo eur bugel, na oa bugel nemetan...!*

*Ma vije bet bras awalc'h kalon an tad hag ar vamm-se evit lezel dor o zi digor d'ar vuhez... ! en eur zigouezout er gear o defe kavet eur bugelig all, kalz bugaligou all, hag a vefe lammet war o barlenn hag o defe sec'het d'ezo o daelou gant o fokou karantezus.*

*Met Jojo a oa e-unan... Ha breman p'eo maro, an ti a zo goullou... ar c'havell a zo goullou.*

*O bugaligou, nag eürus e vefec'h ma vefec'h digemeret, e kement ti a zo, evel êligou Doue !*

*Nag eürus e vefec'h, ma komprenfe ar priedou, eo ar briedelez, araok pep tra, daou ene unanet evit o brasa mat ha gloar Doue !*

*Nag eürus e vefec'h, ma ne vefe mui klevet o sevel, eus pep korn ar vro, klemm ar c'havelliou..., ar c'havelliou o lenva abalamour ma'z int goullou !*

*Nag eürus e vefec'h, ma vefec'h stank awalc'h, e kement ti a zo, evit gellout sec'ha daelou ho kerent, pa vez bet lammet diganto eur bugel bennak... evit gellout rei d'o c'halonou rannet esperans e Doue, evit gellout o lakaat da c'hoarzin adarre ouz ar vuhez... rak en o zi n'eo ket goullou ar c'havell.*

MABIG.

## ●●● Nevez beleget int... ●●●


Nevez beleget int...

Deac'h e oant astennet war leurenn an iliz-veur...

Deac'h e oa stouet o fenn ganto dirak an Aotrou'n Eskob o pedi ar Spered Glan da ziskenn enno...

Hirio e savont ouz an aoter, en o iliz parrez...

Hirio e kanont o oferenn nevez.



Na pebez levez er barrez ! Na pebez levez dreist-holl e kalon an tad hag ar vamm... N'int marteze nemet peorien, met hirio n'eus ket pinvidikoc'h egeto, rak brasa pinvidigez a zo eo levez ar galon.

Ar pinvidik gant e vilionou n'hell ket he frena.

Levez ivez e kalon ar veleien goz pa glevont o seni kleier an touriou evit oferenn genta eur beleg yaouank. Ne gompren ket ar gristenien pegen skuizus eo chom, epad bloaveziou ha bloaveziou, da stourm, atao war ar memes tachenn, ouz leziregez ar gristenien, ouz fallagriez enebourien Jezuz hag e relijion... ouz an techou fall, ouz an drouk-sperejou a glask hada freuz ha reuz e park an eneo...

Hag e rank ar beleg, daoust d'e oad, d'e skuizder, d'e glenvejou... chom war an dachenn ha stourm.

Ha kleier eun oferenn-nevez a ro kalon d'ezan.

Rak maeziou Breiz-Izel o devo c'hoaz beleien...

Ha keit ha ma chomo beleien...

... e kendalc'ho ar vuhez kristen da vleunia e kalonou an dud; e kendalc'ho hon ilizou da veza ti ar bedenn, an tabernakl da loja Hor Salver benniget.

Keit ha ma vo beleien e vo ar suliou hag ar goueliou derveziou leun a levenez hag a beoc'h. Ha d'am sonj, eo kaeroc'h ar sul war ar maez eget e kêr...

**Met ma ya kuit ar veleien...**

o, neuze, Doue ra viro, nag e vo trist hor maeziou !  
Ne vo mui den evit hench a hor bugale betek ar baradoz...  
den ebet ken evit benniga frouez an douar...  
den ebet ken evit sec'ha daelou an dud glac'haret, en eur ziskouez d'ezo ar baradoz...

den ebet ken evit plega pennou ar gristenien dindan bennoz an Osti Sakr...

Ma ya kuit ar veleien e vo adoret al loened gant an dud ;  
ha da genta e vo adoret al loened-se, hag a vev e kalon pep den : an techou fall n'hellont beza kabestret nemet gant ar relijion.

Ma ya kuit ar veleien... Doue ivez a yelo kuit.

O Sent Breiz ,grit na vo ket gwelet en hor c'horn-bro ar pep a zo bet gwelet e meur a gorn bro-all : ar beleg, en eur barrez, oc'h oferenna evit ar wech diweza, o lezel goullou an Tabernakl, o laza ar goulou bihan a oa war elum dirazan, marteze ouspenn kant vloaz a oa...

Aet eo kuit ar beleg... Peur e teuy endro ?

An diaoul en dervez-se a c'hoarzas... hag e vevelien, war an douar, kement-all...

**O va Doue, roit d'eomp beleien !**

Evit ma hello al labourer, a rank bemdez daoublega war e labour, kaout sonj eus e ene ha sevel e zaoulagad war-du an Nenv...

Evit ma redo bemdez, diwar an Aoter, gwad burzudus eun Doue, evit silvidigez ar re veo ha frealziged an Anaon...

Evit ma vo badezet ar vugaligou, benniget briedelez an dud yaouank...

Evit ma welo an dud war o zremenvan o tont daveto ar Mignon-Doue o bleino betek ar Baradoz...

Evit na deui ket an douar da veza eun toull-bac'h a vo ennan mestr ha roue al laeronsi, al luksur, ar fallagriez ha kement tech fall a zo...

Evit ma chomo en o sav tiegeziou kristen hor maeziou ha ma tiwano enno danvez beleien all...

O, dalc'hit d'eomp hor beleien... roit d'eomp beleien !

**DRADEM.**

## Eur potrig divorfil

Eur payan koz, hag a oa e blijadur goapaat ar gristenien, a gav, eun dervez, war e hent, eur potrig daouzek bloaz, o tont eus ar skol katekiz.

— Hag e kredez, eme ar payan, e tiskenn Jezuz, dre ar gomunion, e kalon kement den a vez o komunia ha pa vefent milionou ?

— Chom a reas ar potrig da sonjal eur pennadig... hag e lavaras :

— Pet ti a zo er vro-man ?

— Daoust ha me oar, me ?

— Ha pet prenestr a zo war an holl diez-se ?

— Te gav' d'it, marmouz bihan, eo va micher konta prenestrer ?...

— Ha pet heol a zo o para war ar vro, e kendalc'h ar potrig.

— Pet heol ? Met unan hepken, anat d'it genaouek bihan.

— Mat, eme neuze ar potrig, ma hell an heol mont dre gement prenestr a zo e kement ti a zo, perak n'hellfe ket Jezuz, hag a zo Doue, diskenn, dre ar gomunion e kement kalon a zo ?

... Hag e chomas « bout » ar payan koz.



Yannik en deus kollet e votez... e pelec'h eman ?

## Daelou ar Werc'hez

Er VI<sup>e</sup> kantved, sant Avrit, eskob « Clermont-Ferrand », a savas e « Clermont » eun iliz d'ar Werc'hez, dindan hano Itroun-Varia-ar-Porz. Niver a dud a zeuas, hed ar c'hantvejou, da bardouna da Itroun-Varia-ar-Porz, hag hirio c'hoaz, d'he gouel, e tired ouspenn 100.000 perc'hirin.

E iliz dindan-douar Itroun-Varia-ar-Porz ec'h enorer, dindan hano « Itroun-Varia-dindan-an-Douar », eur skeudenn, eun troatad uhelder d'ez. Skeudenn ar Werc'hez eo, ganti war he divrec'h ar Mabig Jezuz hag a flour dremm e Vamm.

Epad an Dispac'h, eur gristenez kalonek a guzas ar skeudenn, ha goudeze he rentas a-nevez d'an iliz. Met laeret e voe d'an 28 a viz genver 1864, met ne ouezas den perak na penaos na gant piou. Chom a reas dianket epad nao bloaz.

D'ar 4 a viz mae 1873, ar Vikel-Vras, an aotr. Chardon, a embannas er gador oa bet al laer o kovez hag en doa rentet ar skeudenn, en eur c'houlenn ma vije roet da anaout perak e oa bet savet keuz gantan.

Edo eun dervez o sellet ouz ar skeudenn pa chomas mantret, ken mantret ma savas eur c'houezenn yen war e gorf : daelou a wele o ruiilh diouz daoulagad ar skeudenn santel. Sellet a reas outo gant evez, ken tost ha ma karas, hag e welas e chomas gleb divoc'h ar Werc'hez, epad eur pennad amzer.

— Ha sur oun, emezan, n'oun ket en em faziet...

— N'em oa na strafuilh na morc'hed pa welis kement-se; goude hebken eo en em lakis war benn va daoulin hag e c'houlennis pardon.

O sonjal e daelou ar Werc'hez, al laer — ne vezo gouezet bis-koaz e hano — a ioa glac'haret ha beuzet en e zaelou hag e lavare : « spontus eo petra'm eus graet, lakaat ar Werc'hez da lenva ».

Hor pec'hejou a ra d'an Nenv gouela.

Met n'eus forz pegen sammet e vo hor c'houstianz, bezomp sur e kavimp trugarez dirak Doue, ma karomp en em erbedi ouz e vamm ha mont da walc'hi hon ene e sakramant ar binijenn.

NAJOBNAFANCH.

## Taolit evez mat !!

Niverenn Ar Vuhez Kristen Eost-Gwengolo  
a vezo kaset d'eoc'h goude Hanter-Eost.



## Pa vez ar sul gant Lisette

— Gant piou, e lavarez ?

— Gant Lisette...

— Gant Lisette... na pebez hano !

— A, va den mat, hirio eo ret beza desket bras evit kompren hanoioù an dud. Gwechall e oa awalc'h lenn Buhez ar Sent hag al levr-oferenn evit kaout an hanoioù a zouge ar gristenien, met hirio eman ar c'hiz da rei d'ar vugale pep seurt hanoioù komedianed : Lisette, Huguette, Violette, Rosette...

— Rosette... n'eo ket possubl ?

— Pa lavaran d'it.

— Met du-mañ gwechall e oa eur gazeg a oa he hano Rosette.

— Possubl awalc'h... met me oar e pelec'h ez eus eur plac'h yaouank hag a zo ivez he hano Rosette.

— Pa lavaran d'it, va den mat, ar gristenien a zo o c'hoari « lamm choug e benn » gant o skiant-vat. En eun ti, ar verc'h a zo he hano « Mimi », ar paotr a zo e hano « Fafa »...; en eun ti all, ar c'hi a zo e hano « Fafa » hag ar c'haz a zo e hano « Mimi »...

Daoust ha sent ha sentezed ar baradoz a vije aet holl da foueta bro... pe kollet ganto pep galloud war galon an Aotrou Doue... peogwir ar gristenien o deus mez o tougen o hano hag e kavont gwelloc'h henvel o bugale... Muguette, Chipette, Trottinette, Bicyclette... ha me oar me ?

◆ ◆ ◆ ◆

Lisette eo eta hano an dimezellig am eus da gomz anezi d'eoc'h... Savet mat eo bet, e skol gristen he farrez, met he mamm ne veze ket pell evit freuza, tamm ha tamm, dre gamambre, ar vad graet d'he merc'h gant ar seurezed.

Met Lisette a zo bet en eur skol vras ha bez' he deus bet he « brevet réglémentaire », evel ma lavar Seza he mamm na oar na lenn na skriva...

— Pebez kanfartez ! eme Seza o sellet ouz he merc'h... ha Seza a zigore he genou gwasoc'h eget kloc'her Lanludu o kana al Libera pa vez interamant kenta klas...

Seza ne oar na lenn na skriva... na kana kennebeut, rak anez he defe savet eur son war he merc'h ha kanet d'eomp...

Met, eur wech c'hoaz, Seza ne oar ket kana.  
Hag eürusamant evidomp.

Ar sul a oa.

Eur sulvez vras, eur sulvez vras, evel ma lavar an dud-se hag a sonj d'ezo en deus Doue graet suliou bras ha suliou bihan, suliou kaer ha suliou divalo.

En oferenn-bred e oa bet Lisette, ha klevet em eus he mamm o konta, en deiz all en « auto », o tont eus marc'had Lannilis, pegen kaer e oa gwisket he merc'h... Lisette a oa ganti eun « tailleur » nevez-flamm, « couleur pain brûlé »... d'ezan; en he zreid eur boutou « souliers-sports », war he fenn eur « petit relevé paillette »...

Kompren a rit ar galleg uhel-se, va zud vat ? Ya ? Mat neuze oc'h desketoc'h egedoun... rak me n'ouzon ket re vat petra eo eur chupenn liou ar bara suilhet d'ezi...

Met ar pez a ouzon mat kenan, ha n'eus ket ezomm da veza diviner evit her gouzout... Lisette, en dervez-se, epad en oferenn-bred, a oa chalet kalz muioc'h gant ar pez a sonjfe an dud eus he dilhad, eget gant ar pez a sonjfe an Aotrou Doue eus he ene...



Ne voe ket hir he lein gant Lisette, goude an oferenn-bred

— Oü que tu vas, Lisette ?

— A la plage, maman.

— Antansion trapper froid !

Ha Seza a welas he merc'h o vont en hent war he marc'h-houarn.

Met, ken buan all n'em befe ket anavezet an dimezellig...

Abaoue an oferenn-bred he doa kollet he lerou ha diar-c'hen edo breman en eur boutou plat lerennigou o terc'hel an treid enno. Seza a lavaro d'eoc'h e vez hanvet ar boutouse « spartiates » gant an dud hag a oar ar galleg...

Seza he defe c'hoaz kontet d'eoc'h e oa gant Lisette eur « jupe-culotte », pe ma kavit gwelloc'h eul lostenn ledan henvel ouz eur bragez.

Per an ti all a vez unan evelse gantan pa ya da c'houennat panez...

Lisette koulskoude n'edo ket o vont da c'houennat, met o vont « à la plage ». Daoust ma oa tomm an heol ne oa tok ebet ganti.

War a glevan, eman ar c'hiz d'en em lezel da veza rouzet

gant an heol, ken a zeu ar c'hroc'hen da veza melen-du, liou eun anduilhenn paket ganti pemzek derveziad moged er chiminal...

Setu perak, ouz korf-sae an dimezell ne oa ket a vanchou, na berr nag hir... Ankounac'haet he doa ar gemenerez.

Evit miret ouz he bleo da veza diskempennet gant an avel he doa laket war he fenn « un filet », eur roued henvel ouz an hini a lakae Tonton Job ouz fri ar c'hezeg, pa vezent o vedi, evit miret outo da zibenna an ed.

Met roued Lisette a oa e seiz hag hini kezek Tonton Job a oa e orjal

Eur roued... eur roued..., a sonjen ouzin va unan, met graet eo ar roued evit paka pesked... Ha gwella pesketaer a zo eo an diaoul... Diskianta pesked a zo eo ar merc'hed yaouank pennou-skañv... Lisette hag ar re all.

Rak eur bern e oant o vont d'an aod... hag er sulvez-se, koulz hag er sulveziou all siouaz, n'em befe ket bet poan benn o konta an dud a oa er gousperou e « parrez vat » Pl...

Eur blijadur eus ar re c'houeka e voe koulskoude evidoun gwelet eno eur rummad paotred ha merc'hed yaouank.. ar « Jasisted » hag ouz o gwelet e teuas sonj d'in eus komz va mignon mat Per « gant ar re-se e vo savetaet ar vro »... ha n'eo ket gant rederien an aochou.



Epadañ amzer-se ar yaouankizou a ebate war an aod...

D'an aod ez aer, war zigarez klask er yac'h ha mat evit ar c'horf; re stank eo ar dud yaouank na gavont eno nemet ezenn lous da vreina o ene...

Eno paotred ha merc'hed yaouank mesk ha mesk, gwisket pe kentoc'h diwisket ne gred ket va fluenn lavaret penaos, a rede, a ruilhe, a c'hoarze, a c'hoarielle...

Gouezidi ar c'hoajou doun, o welet kement all, a vije bet aet da guzat gant ar vez... rak bez o deus muioc'h a resped an eil evit egile...

Gouezidi ar c'hoajou doun koulskoude n'eo ket o c'horf templ ar Spered-Santel... Met it da rei da gompren ar wirionez-se d'ar pennou-skanv a oa eno ! !

Ha goude beza fringet war an aod betek ar peurdaez diwezat... e voe fringet c'hoaz, en eur sal-dans, betek unnek- eur noz...

Lisette hag e c'hamaladezed a voe digaset betek ar gear gant paotred yaouank hanter-vezo... lous o c'halon ha lous o zeod.

Hag en eur zont d'ar gear, n'o deus ket lavaret o chapelled, anat d'eoc'h.

Hag emañ hor bro o vervel er vreinadurez... hag eman kurun Doue prest da goueza war hor penn... hag e kouezo sur :

ma kendalc'h ar gristenien da c'hoapaat an Aotrou Doue...

ma reont ouz devez ar bedenn devez ar pec'hed;

ma reont ouz devez ar santelez devez ar vreinadurez;

ma lazont o ene war zigarez diskuiza o c'horf;

ma ne deuont ket da gompren, hag hep dale pelloc'h, e hell ar yaouankizou kemeret o flijadur hep lezel kabestr laosk gant o holl zechou fall...

ma kendalc'h ar mammou diskiant ha digalon evel Seza, da gousket dibreder, epad ma vez o bugale, evel Lisette, o louza o ene dre an henchou, kuzet dindan an denvalijenn mantell an diaoul.

PTR.

## SEBEZENNOU

EUR

SANTEGAD

Kavet em eus, war va hent, va mignon koz Olier, ar Santegad. Sebezet maro e oa... hag e lavare hep ehan, evel ma lavar Santegiz pa vezont sebezet : barbar eo !

Hag e stagas Olier da zibuna d'in e sebezennou :

eur bern tud a zo hag a gav eo re ger paea o c'hador, en iliz, daou wenneg bep sul, ha ne chipotont tamm evit paea bep sul eur skoed hag ugent real evit mont d'eur sinema... barbar eo !

tud a zo, kristenien war o meno, hag a gas o bugale d'ar skoliou dizoue, re ger ma kavont rei ugent real pe dek lur ar miz d'eur skol gristen. Ne gavont ket re ger avat rei betek 10 lur bep sizun d'o bugale, evit prena madigou pe mont da zansal.

Tud a zo, kristenien war o meno, hag a ro 10 gwer-neg bemdez d'eur gazetenn digristen (ouspenn 175 lur ar bloaz) hag e kavont re ger rei 10 lur ar bloaz evit kannadig o farrez pe eur gelaouenn gristen bennak... Barbar eo !

Tud a zo, kristenien war o meno, hag a lavar n'o deus ket amzer da vont d'an oferenn bep sul, hag a gav amzer da vont d'ar marc'had bep sizun, d'ar foar bep miz, d'ar friko bep tro ma vezont pedet, d'ar goueliou dizoue bep tro ma vez unan bernak... Barbar eo !

Ya, ya, pa lavaran d'it « Barbar eo ! »

OLIER AR SANTEGAD.

## Santez Anna ha Nikolazig

Aman e weloc'h penaos eo deuet Santez-Anna-Wened, pe Keranna, da veza eul lec'h ken brudet.

(Diwar levr an Aotrouned Buleon ha Garreg)

## Petra eo Ker-Anna

Ar geriadenn a anvomp Ker-Anna, a zo koz-koz. Traou koz kavet enni, a ziskouez ez oa dija anezi e amzer genta an Iliz.

Savet war lez an hent-roman a stage an Naoned ouz Kemper, ha peder leo diouz Gwened, edo dija dismantret pa dremenas dre eno, er VI<sup>e</sup> kantved, Bretoned Breiz-Veur, trec'het gant ar Saozon, hag a deue er vro-man, Bro-Arvor, da glask goudor.

An divroidi a chomas a-zav el lec'h-se, a zouge da Santez Anna eur garantez vras kenan, hag a savas eno eur chapelig

en enor da vamm goz Hor Zalver Jezuz-Krist. Setu ma voe anvet ar geriadenn : *Ker-Anna*.

Ar geriadenn hag ar chapelig-se avât a zo bet distrujet meur a wech gant an armeou soudarded a waste ken alies hor bro, d'ar c'houlz-se.

Koulskoude an ano roet gant ar Vretoned d'al lec'h santel-se a harpas ouz pep dismantr; ha nao c'hant bloaz goude e kendalc'he da veza anvet gant an holl : *Ker-Anna*.

E pe stad edo Ker-Anna er XVII<sup>et</sup> kantved ?

Henvel awalc'h ouz an tiegeziou koz a welomp hirio c'hoaz war ar mêz : Eun ti plouz hep solier; en diavêz d'ezan diri mein da bignat er c'hrignol; kreier hag eur c'harri en e gichen, eul leur dirazan hag eul liorz labourer kempenn.

Setu ti Nikolazig evel m'edo gwechall, hag evel m'her gweler hirio c'hoaz.

Seiz tiegez a gaved e Ker-Anna, o chom enno eun hanter kant bennak a dud; bez' e oa keriadenn vrasa ar barrez moarvat.

Eno edo o chom, ouspenn Yvon Nikolazig : Juluan Lezulit, Mark Erdeven, Yann Tanguy, Fanch ar Bleavec, Jakez Lukas, ar Pilikard hag eur beleg : Yvon Richard, chapalan eur chapel war mêz.

Yvon Nikolazig en doa, en e atant, eur park anvet, n'oar den perak, ar Bosenno; eur park brudet bras tro-war-dro, rak eno, hervez ar re goz, e oa gwechall eur chapel savet en enor da Santez Anna; setu ma teure tud da bedi eno, evel en eul lec'h santel.

Hag e doare, ar gredenn-se a seblante gwirion, rak bep an amzer, al labourerien a zizoloe mein benerez e douar ar park, ha Nikolazig zoken, e 1615, a implijas eul lodenn eus ar vein-se da adsevel e garrdi.

Eun dra all a deue c'hoaz da greski brud park ar Bosenno : Park ebet, e Ker-Anna, ne zouge kement a frouez hag hen, ha morse koulskoude ne veze lezet da ziskuiza evel ar parkeier all.

Met, tra souezus, n'helled e labourat nemet gant ar bal. Biskoaz den ebet n'hellas e drei gant an alar, rak an ejenned, degouezet en eul lec'h eus ar park, a jome krenn a-zav, ha ma klaske al labourer o lakat da vont war-raok, e spontent kentoc'h.

Evelse, er memes dervez, Nikolazig a dorras eno betek daou alar, o klask lakat e ejenned da vont ebiou.

Ha dirak ar burzudou-se, an dud, hep beza re souezet an holl a lavare : « *Hennez eo park ar chapel.* »

Ouz ar park, izeloc'h eun tammik, edo poull-doura ar geriadenn a reseve e zour eus eur feunteun goz a oa e karg ar beleg Yvon Richard.

V. S.

## JEZUZ-KRIST HAG E RELIJION

(Kendalc'h)

*Eil lodenn :*

### PETRA 'N DEUS GRAET JEZUZ-KRIST ?

Nerz ar skouer.

En eur skouer e kaver, war eun dro, nerz ha sklerijenn.

Evit klevet mat eur gentel, netra ne dalv kaout, dirak an daou-lagad, eur skouer beo.

Setu perak, Jezuz, araok prezeg e Aviel, a zo falvezet gantan ren, e Nazared, epad 30 bloaz, eur vuhez kuzet; eur vuhez a labour, a boan, aketus da viret an holl zeveriou en deus pep den e-kenver Doue hag e nesa.

Aes e vezo d'ezan, goudeze, displega d'eomp hon deveriou : an hini en defe aon da entent fall e gomzou a hello sellet ouz ar skouerioù en deus roet d'eomp.

E skouerioù a daol eta sklerijenn war E gelennadurez.

Sikour vat a roont d'eomp ivez evit miret e c'hourc'hemennou.

N'eo ket Jezuz eur mestr diskiantek na oar ket petra c'houlenn digant an dud.

Anaout a ra hor sempladurez, rak den eo evelomp; desket en deus, koulz lavaret diwar e goust, petra eo labourat, senti, beza disprizet, tamallet e gaou, gwasket gant an dud; gouzout a ra pegen kalet eo awechou pardoni; gouzout a ra zoken petra eo beza tentet.

Ne c'houlenn eta diganeomp netra na anavezfemp ket, netra hag a ve dreist hor galloud.

Ar pezh en deus graet, hep beza dalc'het d'hen ober, dre garantez evidomp nemetken, perak n'her grafemp ket pa 'z eo hon dever hag hor mad hen ober ?

Ar vuhez.

Ouspenn sklerijenn ha nerz, Jezuz en deus roet d'an dud ar vuhez. N'helle ket rei d'ezo kaeroc'h tra.

Dalc'hmata, en Aviel, ez eus hano gantan eus ar vuhez : « *Me, emezan, eo ar vuhez. Deuet oun evit ma vezo buhez ennoc'h. — An hini a gredo em c'homzou hag en Hini en deus va digaset, hennez en devo ar vuhez a bado da viken.* »

Ha n'eo ket eur vuhez bennak a ginnig Jezuz d'eomp, met buhez Doue E-unan.

En em c'hraet den eo, evit ober ac'hanomp e vreudeur, e vreudeur diou wech : dre gemer evitan hon natur-den, met ivez ha dreist-holl, dre rei d'eomp E natur-Doue, gant an holl binvidigeziou hag an holl eürusted a denn d'he heul. Rak ar vuhez a zigas Jezuz d'eomp a zo pell en tu all d'an holl vuheziou anavezet.

Kaer int ar re-man koulskoude ! Bez' ez eus, en holl draou beo, eun dra bennak hag hol lez mantret, pa sonjomp mat enno.

Setu aman eur c'hreunenn winiz taolet en douar. Maro eo diouz he gwelet. Diwan a ra koulskoude, ober gwrizioù, korzenna, evodi, hag elec'h eur c'hreunenn ho peus daou-ugent, hanter-kant hag ouspenn.

Souezusoc'h c'hoaz eo buhez al loened. Mont ha dont a reont anezo o-unan. Anaoudegez o deus eus ar pezh a zo mat pe fall evito. Izili o deus, graet ken brao an eil diouz egile ha diouz o doare-beva, ma hellont ganto pourvei d'o holl ezommou hag en em zifenn.

Uheloc'h eget al loened eman an den. A vent hag a nerz emañ warlerc'h eur maread anezo. Met gant e skiant hag e volonteiz eo mestr d'ezo holl. En em servijout a c'hell evit e vad eus kement a zo en-dro d'ezan.

Petra da lavaret bremañ eus buhez an aelez a zo sperejou pur ?

Petra da lavaret dreist-holl eus buhez an Aotrou Doue, krouer ha mestr ar bed holl, a zo ken mat e pep doare ma n'hell ket gwellaat an distera e doare ebet ?

Mat, n'eus forz pegen souezus eo kement-man, ar vuhez a bado da viken, ar vuhez a zo hano anezi ken alies en Aviel hag a fell da Jezuz rei d'eomp perz enni, eo buhez an Aotrou Doue e-unan.

Savet evelse da renk uhel bugale Doue, an den, n'eus forz pegen izel, pegen reuzeudik eo e stad a-hent-all, a zo hiviziken din a resped evit an holl, hag evitan e-unan da genta. Evit derc'hel e renk, e tle diouall, gant ar brasa evez, da louza e ene, koulz hag e gorf a zo breman templ ar Spered-Santel.

#### Ar c'hras.

Ar vuhez-man eo a vez graet anezi « *ar c'hras* », ha n'eo ket hep abeg. Eun donezoun eo a-berz Doue, ar c'haera eus e holl zonezonou. Hogen da Jezuz eo ez omp dleourien anezi.

#### E c'hras eo.

Roet e oa bet, a dra zur, gant Doue d'hon tud kenta e baradoz an douar. Met he c'holllet o doa, dre o fec'hed, evito hag evit an holl dud, o bugale.

Ha Jezuz eo en deus he restalet d'eomp dre e Basion hag e varo.

Evel ma lavar Sant Per, « *prenet omp bet n'eo ket gant aour na gant arc'hant met gant gwad presius an oan dinamm* ».

Gras Jezuz eo, dre ma ra ac'hanomp bugale Doue ha breudeur Jezuz; ha war Jezuz eo e rankomp kemerout skouer evit he lakaat da dalvezout. Gras Jezuz eo c'hoaz, rak dreizan e teu d'eomp. Jezuz n'en deus ket hepken digoret d'an dud dor ar baradoz, o vervel evito war ar groaz... Doue e dad en deus fiziet ennan an holl c'hra-sou en deus gounezet d'eomp. Jezuz eta eo a ro d'an dud buhez ar c'hras hag he c'hresk enno. Ha daoust ma 'z eo pignet d'an Nenv, n'en deus ket hon dilezet... Dalc'hmat eman o pedi evidomp, o kinnig d'eomp an holl grasou hon eus ezomm evit ober hor silvidigez.

Gras Jezuz eo, peogwir dreizi ne reomp nemet unan gant Jezuz : « *Me, emezan, eo ar winienn, c'houi ar skourrou* », da lavaret eo, e vevomp diouz e vuhez evel ma vev ar skourrou diouz buhez, diouz seo ar wezenn m'int staget outi. Ha n'hellomp ket beza distaget diouz Jezuz, hep koeza raktal e stad a varo, evel eur skourr distaget diouz ar wezenn.

Ya, Jezuz eo ar wirionez an hent hag ar vuhez.

REP.

## Abardaez - hanv

*Du-hont an heol 'zo aet e kuz,  
Ha war e lerc'h an oabl 'zo ruz.  
Sin vat a zo, rak-se, warc'hoaz,  
Amzer dispar hor bezo c'hoaz.*

*Eus lein an tour, diwar e dron,  
An Angelus ar c'hloc'h a son.  
Ha d'an Nenvou, evel moged,  
E sav pedenn ar Vretened.*

*Dre an hent kleuz, ar chatal mut  
A gerz d'o c'hraou araok o zud,  
Ha war o lerc'h, e skeud ar c'harz,  
En eur vont-dont ar c'hi a harz.*

*Al laboused a dav o c'han;  
Da glask he c'hud e nij ar vran;  
Ar c'haouenned er c'hefiou koz,  
A c'harm klemmus, a c'halv an noz.*

*Eur sterig koant o ruilh he dour  
En draonienn c'hlas dre ar yeot flour,  
Kammigellet evel eun naer  
A garg ar prad a vuzig kaer.*

*War ar bod-lann, an eostig noz,  
A gan lirin e gaera poz,  
Heti a ra d'al labourer,  
Eun nosvez vat, leun a zousder.*

*Eun avelig dinerz a c'houez,  
A hej goustad deliou ar gwez,  
Hag a zigas er parkeier,  
Trouz ar mor-bras war ar reier.*

*A-nebeudou ar sklerijenn  
A ro plas d'an denvalijenn,  
Dre ma enaou flamm ar stered  
En oabl divent, kaer da welet.*

*Pep dor breman a zo klozet :  
Kouskit dinec'h, o Bretoned !  
Ehanit mat ho memprou skuiz,  
War ho labour e kouez ar gliz.*

L. B.

**|||** Gwiriou ar Relijused  
o deus graet ar brezel.  
Ar pez o deus bet épad  
ar brezel : =====

**|||** gwir da vont d'an tan . . . **gant ar re all**  
gwir da c'houzanv . . . . . **gant ar re all**  
gwir da vervel . . . . . **gant ar re all**

*Ar relijused a zo bet evel ar re all  
en tan, er vouilhenn, betek ar maro.*

Ar pez o deus hirio dirak  
al lezenn : =====

**|||** difenn d'en em voda . . . . **evel ar re all**  
difenn da gaout o zi d'ezo **evel ar re all**  
difenn d'ober skol . . . . . **evel ar re all**

*Goulenn a reont ma vo graet outo evel  
ouz ar re all er peoc'h koulz hag er  
brezel.*

Goulenn a reont épad amzer  
ar peoc'h : =====

**|||** gwir da bedi . . . . . **evit ar re all**  
gwir da labourat . . . . . **evit ar re all**  
gwir da vervel . . . . . **evit ar re all**

**|||** Ra vo roet d'ezo kement ha kement,  
keit-ha-keit eget d'ar re all, er peoc'h  
koulz hag er brezel.